

GWEZ

Ezhomm o deus a zour hag a zouar, a heol hag a sklêrijenn evit kreskiñ. A bep seurt livioù o deus hag a bep seurt stummoù ivez. Lod a zalc'h o dilhad e-pad ar bloaz pa goll re all o delioù e-pad ar goañv.

(fin reizhskrivadeg ar CE)

Skevent hor planedenn eo ar c'hoadoù ha krog eo an dud da gompren pegen pouezus eo o gwareziñ. E-pad re bell amzer ez eus bet lezet digoadañ dizamant ha diskar ar c'hleuzioù. Koulskoude eo prizius ar gwez da zisaotrañ an aer ha da reiñ bod da loened a bep seurt.

(fin reizhskrivadeg ar CM)

A-viskoazh eo bet tomm kalonoù hor barzhed ouzh kened hor mignonezed mut. Youenn Gwernig a gane gwez kalonek hor bro, faou, kistin ha derv. Anjela Duval o floure gant he dorn hag he sell. Evel ar rusk war ar wignenn emañ kizidigezh o c'halonoù ha kalet evel derc'h mennegezh o spered.

(fin reizhskrivadeg ar skolaj)

Diouzh an douaroù ha torosennadur ar vro emañ ar gwez pe ar gwezigoù. War ar c'hleuzioù hag ar girzhier : gwez-kelvez, spern-du ha spern-gwenn, gwez-haleg, kelenn, kistin, mesper, derv ha balan. En douaroù gleb e sav an onn, ar pupli hag ar gwern. Gwechall e veze gwez-evlec'h o waskediñ an atantoù hag en-dro d'ar beredoù e planted gwez-ivin. Er gwerjeoù emañ ar gwez-frouezh : avaloù, per, prun, kerez ha kraoñ. Keuneud a dalvezo da dommañ hon annezioù pe c'hoazh prenn d'ar gilvizien pe d'ar vunuzerien da sevel tiez pe d'ober arrebeuri.

(fin reizhskrivadeg al liseidi hag an dud deuet)